

Niv. 49
15 c'hwevrer - 15 meurzh 1974

« POBL VREIZ »

B. P. 304
29273 BREST CEDEX

KOUMANANTOU

Boutin : 6 L

Skoazell : adaleg 15 L

K.R.P. 2746-79 ROAZON

POBL VREIZ

0,50

KELAOUENN UNVANIEZ DEMOKRATEL BREIZ

PENNAD-STUR

Tarzhadeg zo bet, un tammig e pep lec'h, er mizioù tremenet : en bro-Korsika, en Breizh gant an F.L.B., en Ulster, en aerborzhioù gant Palestiniz ; rener fasist gouarnamant bro-Spagn zo bet lazhet gant an E.T.A..

Petra a soñj an dud ? A bep seurt a vez klevet : diouzh un tu : «Anez mont dre nerzh, ne c'honezer mann !», «Breizh par da Iwerzhon, memes emgann, memes tuioù, memes doareoù». Diouzh an tu all, er c'hontrol : «Poent eo dasesaat an holl ekstremisted-se».

Mesk a zo e pennoù an dud. Ra zegaso ar pennañ-stur-mañ un tamm sklêrijenn d'hon lennerion.

1 - Aczet eo remerkañ penaos kazi tout an taolioù-spont-se a c'hoarvez e-touesk pobloù a vez c'hoazh o stourm evit o frankiz, pobloù ha n'int ket bet didrevadennet (digolonizet). N'eo ket echu an didrevadenniñ, pell ac'hane. Hag ur gudenn a-bouez eo evit broioù ar c'hornog (kuzh-heol), ur gudenn a zo bet lakaet war-wel ganimp, ha na baouezomp ket da zisklêriañ d'hon c'henvroiz.

2 - Da ziwall zo d'ober avat ! Mezevennet e vez kalz tud, reoù yaouank dreist-holl gant heñveladurioù evel hemañ : ETA - FLB - IRA. Evite, ec'h eo dispac'heloc'h ar sponterezh (terrorism) eget an ober politikel rik... Dalc'homp soñj koulskoude eus ar fasisted pe eus an O.A.S. : ar sponterezh n'eo ket araokour (progresist) dre ret. En tu-hont da se, n'haller ket lakaat war ar memes pazenn stad Palestiniz pe Euskariz (Basked) gant hini ar Vretoned. Ober fae war Palestiniz pe Euskariz e vefe ! Pep pobl a zle stourm diouzh ma vez kont evite.

3 - Pehini eo ar gwir poell politikel ? Un ober politikel a zalc'h kont eus ar bobl. Ret eo stourm evit ar bobl, gant ar bobl hag er bobl.

Pa n'eus ket moien d'ober a hent all, pa'z eo bet sklaer aet ha startaet emskiant ar bobl gant ar gwalennoù a vez o waskañ warni, neuze e c'haller ober gant an nerzh kriz, gant ar sponterezh.

Ni, tud an U.D.B., n'hon eus biskoazh lavaret e oa fall ar sponterezh e pep degouezh. Dont a ra a-wechoù ur mare pa n'hall ket ur bobl gouzañv ken. Ya, a-du omp gant pezh a ra an I.R.A. ofisiel en Iwerzhon hag an E.T.A. en Euskadi. Stad an traoù en Iwerzhon hag en Euskadi avat, a zo kant gwech krisoc'h eget en hon bro-ni. Pa c'haller tremen hep ar brezel, ec'h eo gwelloc'h hen ober ! Keit ha ma vo posubl, eo dleet dimp-ni, Bretoned, argas ar brezel.

Derc'hel a raio an U.D.B. da vont gant an hent he deus choazet a-viskoazh. Ezhomm a vo da zistruj traoù zo, anat eo. Hogen ar pep pouezusañ n'eo ket *distrujañ ec'h eo met sevel*.

AR PEP POUEZUSAÑ N'EO KET DISTRUJAÑ EC'H EO, MET SEVEL



Hon c'hamarad Le Mée gant pemp plac'h yaouank eus Ti Doux, Pederneg.

UDB



**LUCTUAT
NEC MERGITUR**

Setu al fur gall war-veuh, da lavared eo n'e n'eus talvoudegezh resis ken e-keñver moneiz ar broioù all. E gwirionez emma berr war e sparl hag e dalvoudegezh zo aet war-draoù euz pemp dre gant. Pa'z a an arhanth war-draoù an ur vro e va prizioù ar varhadourez war-geñ. Sellit en dro dez ar stalioù hag e wlot an diforh abou daou vich. Al labourerien an hini vo lakaet diez adarre, evel kustum. Eur gwall-daoi eo an darvoudoù-mañ evid Breiz hag evid he fobli. Da genta, abalamour eo savet nebeutoc'h al labourerien amañ eged leh all. D'an eil abalamour eo kresket priz kas ha degas ar varhadourez, ha Breiz a zo pell euz «klon ekonomikel ar c'hwech'klog», evel ma lavarfe an deknokrat. Da houe, abalamour ne werc ket or bro trawal ha varhadourez e diaz, dre m'ez eo manet he ekonomiezh war-lerh ; ha setu perak ne hell ket ober he mad euz pe z a zo bet divizet gant ar gouarnamant evid kiask gwerza muioc'h an estrenvro.

Neuze eta, e weler skler ha splann penaos, ma fallh an traoù da vond evelhenn, emma ar re binvidigezh eo ar vez gant an U.D.B. Eun dra a' bouez eo. Rak emañ ar vez emañ ar bobl.

Lili Morvezen, Konk-Kernev.

**JOBERT
PE AN ANKOUD MOD NEVEZ**



Gwechall n'eoas an Ankoù nemed eur fall lemm hag eur c'har da charred ar re varo. Bremañ avad n'eo ket armoù a ra diouer dezañ. Armoù a bep seurt, an eil danjerioù evid dezañ. Ar gouarnamant gall an hini a zeu ar maout gantañ evid lakaat lina ha gwerza c'hoarileoù e-gliz-se. Ouzpenn etz miliard n'eus touchet war-lene diwar kenwerz ar maro.

Nevez zo eo bet an otroù Jobert, ministr an estrenvro, e wled rouane arab e broioù ar Mor-Ruz. Setu amañ an diviz a zo bet etrezo : «Dipont din frankoù tuellenn ar mazout, emezañ, ha me roio dech peadra da laza pe da vahagna o enbrouer a-ziviez hag e-zlabarzh labourerien, socialisten, gochistenn, otomoned, hag all. Ni a oar petra eo. Pa vo diabarzh ar vro

euz an amprevaned-se a vo gwerzet dech uzinno ha marteze louzoù evid para ar re glañh hag ar re loazh. Bremañ n'i ho peus re arhanth eo dao dech gronna anezhañ eo arsanalid, eno ne gollo ket e dalvoudegezh.

— C'hwil a zo eun den evel zo diet, eme ar rouane. Grit hor gouarnemnoù d'ho mestr ha lavarit dezañ eo bet a-viskoaz an Arabed migromed braz d'ar Franzizien. Moarvat vo tu d'an em glevet eur wech c'hoaz.

Ha setu penaos ez alo armoù graet, kalz anezo, gant labourerien Vreizh da laza labourerienha dispasherien broioù ar Mor-Ruz.

KORSIKIZ EN TOULL-BAC'H



Bezit dinec'h, lennerion gaezh, n'em eus ket c'hoant lakaat ma fri en saferioù diabarzh ur

pour ha trichin

Kenroad ker.

N'oun ket atao a-du gant menzioù U.D.B. Met difennet eo ar vez gant an U.D.B. Eun dra a' bouez eo. Rak emañ ar vez emañ ar bobl.

Lili Morvezen, Konk-Kernev.

Kenroad ker.

Bourmañ a reer bremañ en ur lenn ho kelaouenn dezhi he stummi nevez. Kavout a reer enni, brezhoneg mat, hep re a c'herioù chimik na gallegioù.

Dav eo brezhonekaat an U.D.B., rak diptet na pa wellan migromed diouz ar strollad-brezhonegerien an holl anezho - o trailhañ gallez, forzh pegement. Ha na vez ket implijet yezh Pobl Vreizh gant ar re a stourm eviti, n'ouzon ket ma talv ar boan hen ober.

Ganeoc'h evit Breizh hag ar sokialouriezh.

X. Roazhon.

KOUMANANTIT DA

PUBL VREIZH

ALANHOE URVAET, MAESTRE, 1972

ANV ANV-BADEZ
 CHOMLECH
 a gas e gouarnant boutin : 6 F (1)
 skoazell : adiek 15 F (1)

Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1)
 mandat-lizher (1)
 chekenn-bank (1)

(1) diwerkit ar gerioù na servijont ket.

K.R.P. ROAZHON 2 746 - 79

vro estren - Penaos stourm a-enep ar wakerion ?
 Ar stumm a die bezañ dibabet gant pep pobl hec'h-unan, goude bezañ sellit pizh ouzh kudennoù lipial ar vro. Ha n'eo forzh penaos, da hep hini e damm labour evit kondonoù, ez eus ul *lez-vara-suretez*, e Paris, ha labour ar stad c'hall n'eo ket hon hini.

Korsikiz zo aet droug enno, ha n'eo ket souezh, tamm ebet, ma vez klevet, muioc'h-mui, trouz ar bombezennoù o tarzhañ en «*Enferno-sgardeur*». N'eus labour ebet evit an dud, evit ar re yaouank drest-holl, a rank kuitaat a-vilaedoù o bro, a zo deit da vezañ baradoz arc'hantus ar bromotourion (o deus lakaet o c'hrabanou war an adoù) ha baradoz an alouberien a-vremañ an douaristad.

Ma vez tavet a-benn ar fin ur Skol-Veur e Korte pe e lec'h all, ma'z eo bet roet d'ar skolioù, evit ar wech kentañ, da zibao e vezh e vachelouriezh, ne vo ket diskoulmet memestra ar gudenn gant ken nebeut a dra.

Goude bezañ paket ar vrogourion Stromboni ha Filidori, ha kaset diouzhtu betek Paris dre ur c'har-nij eus an arme, Sahigneti (ur c'horsikad «bro-gskoura anezhañ») en deus lavaret : «Ao otomoned n'int nemet genouerien dianevezet ganto an litor !»

Poent bras e vije da Sahigneti lakaet e luredoù. N'emañ ket pare c'hoazh Lev Litor Bro-C'hall. Pajennoc'h c'hoazh zo da skrivañ (pe da lemel...) Met mat e vije dezhañ diwall gant aon ma vije al lev-mañ ur peji stignet etre e zaouarn !

**LEVRIOU BREZHONEG
TI ERWAN MOREAU**

15, plazenenn an Iiz-Veur

22 - LANDREGER

Pg : 20-32-76

ERRATA

Er pennad «*Marched Pessis*», niverenn 48, ret eo lemm :

Kentañ linnen :
 «Douz d'an tregont vloaz tremenet, me o gwel diad va daoulagad evel pa vefe dec'h»
Pempvet linnen :
 «Atav me 'wel o dremmoù, blev melon, pikou paner, o daoulagad digor bras a pa laren un itor plijus bennak, un tammig kouant koulskoude»
Ha pelloc'h :
 «Ar gvir a-enep d'ar Bed»

KOUMANANTIT DA

LE PEUPLE BRETON

JOURNAL DE L'UNION DEMOCRATIQUE BRETONNE

ANV ANV-BADEZ
 CHOMLECH
 a gas e gouarnant boutin : 12 F (1)
 skoazell : 20 F (1)
 estrenvro : 20 F (1)

Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1)
 mandat-lizher (1)
 chekenn-bank (1)

Diwerkit ar gerioù na servijont ket.

K.R.P. ROAZHON 2 365-76

Hag a-nevez er vro ?

YAO EN HENT

Sic'het eo ar Vretoned abaoe re bell amzer ar fankeg met, evuzamant, hon eus kavet tud a-hed hon istor da reñ dimp nerzh-kalon. Trugarez dezha ma c'hellomp d'an deiz a hirie gwelout skiaeroc'h, uheloc'h ha pelloc'h.

Evit hon amzer-ni, seizh plijadur hon eus, ha diok ouzhpenn, o treñ evidoc'h tammou galleg tenet eus ur pennad-kriz bet moulet e miz Kerzu 1973, war e *Peuple breton*, titl ar pennad-kriz a zo «An U.D.B. er stourm enep-kapitalour». Setu-añ :

... Ne c'helle an U.D.B. respont e-vas nemet d'an diskoulmet a rofe tu d'ar Vretoned da vezañ mistri penn-da-benn war o feadra, da lavarout mistri war produñ ha koñverez ar vro, gant ma vefe ivez ar Vretoned, hervez lezenn an demokratelezh, mistri penn-da-benn war an aferioù a sell oute-ouzen, evel sevel planoù ekonomek pe pliedh ouzh o c'hudennoù svederdurezh.

Un anv a roer d'an holl draoù-se : sokialouriezh. Dindan besuñt renerzh, staget gant pesuñt ereoù ouzh ur gailoud-krez gall pe europat ? A-stumm gant ur stad «federat» e kerc'henn un Europa sokialour diouz patrom republikoù an U.R.S.S. ? A-stumm gant ur stad sokialour breizhat dihañv ? A-dal d'an holl degouezhad-annioù, n'eus abeg abeg da vezañ re dechet da hini pe hini anezha na kennebeut, da vezañ spontet den dirak hini pe hini anezha. D'ar Vretoned ouzan e vo ober an dibab pa vo deit mare istroal an tremen d'ar sokialouriezh, ha diaz e vefe linañ dre ar munud, diwar-vremañ, penaos e vo kaset an dra da benn.

Ata, breudeur ha c'hoarezed, kasi dimp ho soñj diwar-benn shent breizhat ar sokialouriezh, trugrez en a-raok !

KALEIDOSKOP 74

Nevez vould'het eo 1974 ha pa sellomp ouzh stad an traoù er vro, e welomp, evel e foñs korzen ar c'haleidoskop, ur bern skeudennoù, kerher-ha-kerher, skeudennoù Bretoned ha Bretonezad krog gant un doare-bevañ kaletoc'h-kaletañ.

Pa droomp hon sellioù war-du ar mor, e welomp pasketation gwall-nehet gant kresk priz ar gazoil, ha kresk an holl draoù oberiet diwar ar petroil evel ar funuc, ar roudoù, hag all. Koustañ 'ra ker mont er mor ken eo krennet gounid pep hini. Gant harp o sindikadoù, C.G.T., C.F.D.T., «Aotonomes», labourerien ar mor o deus diskouezet o imor fall e porzhioù Mor Breizh ha reoù an Atlantik.

Gouenn a reomp ma vefe marc'hadmatoc'h ar gazoil. Betek bremañ, e ra skouarn vouzar penn ou bras ar «Marina». Betek pegoulz ?

Tost da Vrest, n'eo ket gwelloc'h ar jeuz gant labourerien all, kouezhet eo ur c'hleñved war an ister. Den ne oar pegoulz ha penaos e vo kavet ar pare.

Ma, n'hellomp ket lavarout eo krogret 1974 eus ar c'hentañ evit hon tud-a-vo.

Ha war-du ar maezioù ? Ouzhpenn 270 000 loen-korn pe leue a zo bet gwerzhet e Foujere-pad 1973, hep kontañ a loen-korn all gwerzhet e Gwerzhin pe e Kastellin pe e plasoù all ar vro.

Der'het al dra da stourm ar saverion-loened evid kout ar priz dearet evit al laezh hag ar chip. N'int ket deuet da-benn c'hoazh.

Douit ha degaset o deus ar mekanikoù nevez muioc'h a azamant er menajoù ha nebeutoc'h a boan-ispred ? Setu pezh a lavare un nebeut labourerion-dour dastumet da vare un «daol-grenn», nevez 'zo, e kreiz Breizh :

«... Du-mañ, ne oar den kanañ ken, ha n'omp ket ken evit rapañ etre amezion plijadur ha gwallere... Benn ar fin, n'omp ket evit-ouzh eget gwechall... Bez' e chom ar merched sklaved ar menajoù. Die en deus sammet meur a hini war e gin, ha bremañ eo ret pazañ, pe... Abalamour d'ar mekanikoù, hon eus kollet ar pleg da c'houlenn sikour digant ar re all... Kalz modernoc'h alies ar c'hrevier eget an tiez... Gant ma vo



REJIONOU GALL HA TREVADENNOU FRANS

Un tamm mat a amzer 'zo, e lavaras kement-mañ den (na oa ket ur gall) : «Helvel eo bro-Frans ouzh ur vantell harlikin gwriet gant ur foll». An otroù Pyrethite, ar ministri a ra war-dro ad-stummañ ar rejionoù, en em c'houlenn marteze ha n'eo ket brein neud ar vantell. Eustañ, Turgot ha Necker o deus tapet lamm dre ober re-en-dro d'ar rejionoù, en o amzer. Pyrethite, hag e genseurt, na fell ket dezhe bezañ tapet ar peji, setu perak n'houi ket gwelout ar rejionoù nevez-savet. Skoumañ darempredoù gant rejionoù estrenna, n'houi ket kennebeut gwelout anezhe o sevel servijioù-rejion dindan urzh ur prezidant-rejion bennak, hep tremen dre ar prefed.

Otroù Pyrethite, d'ober pezh po c'hoant gant ho rejionoù, ho re, n'eo ket graet ho lezennou, plij pe dispilj, evit ho trevadennou, da lavarout evidompoù, Bretoned, Euskariz, Okitaniz, Korsikiz hag all !

Ur c'hast a renk uhel a hopas un deiz war unan eo rouanez : «Taol plied, La France, emañ da gafe o vont !»

Ha n'hoch eus ket klevet den ebet o hopal varnoc'h ? «Taol plied, trevadennar, emañ ho sklaved o tihunij !»

'Peus ket ? Ma, gvañh ase evidoc'h !

**Petra zo nevez e Breizh ?
Tan ha moged zo e-leizh !**

Evit an teirvet gwech, ez eus bet tapet tud eus an F.L.B. Ar wech-mañ e oa an F.L.B. nevez

kolli ebet war briz al loened... Stag omp evit 90 % eus hon ezhommoù ouzh estrenvioù pell hag estrenna.

Ha gwelloc'h an traoù eus kostez an uzinnoù-forban ? Tamm ebet ! D'ar poent ma skrivan al linaennou-mañ, n'eo ket euzh gvir labourerion Ti Douk, e Pederneg. Pegert diwez eo tannañ gwernion eus godelioù ar batronek.

Pividikoc'h eget labourerion Douk eo an estra-jourion, Sazon hag all, a zeu da Vreizh, da bremañ, ker-mat, penntiez hon tadoù, gant harp evelas trefnourion 'zo.

Mat, poent eo renkañ ma c'haleidoskop, ne gollan ket kalon da zerc'hel soñj eus ar c'hrenn-lavar :

«Ar bank en tan ne lakaer ket
 Dre ma vez an sic'houz kollet»
 Adkavet e vo an sic'houz, arvet eo «frankiz»



REJIONOU GALL HA TREVADENNOU FRANS

pe F.L.B.-L.N.S. Un ugent den bennak a oa bet harzet, drest-holl e Konk-Kernev, met ne chom bremañ nemet pevar den yaouank en toull. Tamallet zo dezhe bezañ kement pezh en taolioù graet nevez 'zo a bro Konk-Kernev (maner Kernaered, marina Forest-Foñ, hag all). Betek-henn n'eus bet tapet den eus an F.L.B.-A.R.B.

War a lavar tud 'zo e'ch eo bet un tenn er chleñv rak en-gortoz eo ar polis da dapout ur bern tud, sañset. Dre forzh bezañ tapet, e premont skiant, sur a-walc'h.

'Meus eus eo krog ar c'hwen e loeroù Pompidou Messmer, Marcellin hag all... rak d'an 30 a viz genver zo bet berzet (difennet) pevar strollad : an deou F.L.B. ar F.C.P.L. (pe F.L.B. Bro-Gorsika) hag EMBATA (Bro-Euskadi). Evit an tri gentañ e'ch eo lu-awalc'h dezision ar gouarnamant, rak n'eus forzh penaos e oant pell 'zo er-maez al Lezenn, pe a-enep dezhi. Un digarez ne oa ken, evit skell gant EMBATA, hag a dach diskleriet hervez al lezenn. Roll EMBATA a oa sikour Euskariz ar c'heltatez a zeu da glask repu en hanternoz (tu Bro-C'hall). Se o gweliet fall gant Franco, ha pa ouzer ket mien mat en glev Marcellin gentañ, n'eus ket pegien mat en glev souezhet. Ur skouer ouzhpenn e'ch eo eus fall-greizh ar gouarnamant gall a-enep pobloù bihan an Egnagon.

JOB AN DIC'HOUGER



RET DIN

LABOURAT BUANOC'H 'VIT MA SKEUD!

Ar poster-mañ zo bet graet gant Nono, a-berzh Kevrenn U.D.B. Gwengamp, evit sikour grevisted Pedernek. 5,00 lur. Da brenañ digant ar c'homite-skoazell, pe digant tud U.D.B. n'eus forzh pelec'h.

Trubuilhoù an Emsav kozh pe ar film «TI PRI»

Bet hon eus e Naoned ar film e brezhoneg *Ti pri* diskouezet en Oaled al labourerezed yaouank. Bamet omp bet gant e skeudennoù kaer ha kaeraet muioc'h c'hoazh gant sonerezh dispar Beethoven. Bamet omp bet ivez gant doareoù ampart an aozer evit reiñ efedoù fromus eus buhez ar c'houer ha lakaat an dud da gompren mat stad truezus ar vro. Un dra koulskoude en deus torret un tammig hon plijadur : ar pezh a

gonte Alan Stivell. N'omp ket a-enep dezhañ, met ne oa ket distaget mat. Ouzhpenn-se ne oa ket sklaer ar son. Gerioù brezhoneg re ziaes a oa gantañ ivez.

Da betra a servij ur film evel hemañ ma ne vez ket evit tennañ kentel ? Met re an Emsav kozh a ziskouez alies buhez ar bobl evit reiñ pouez d'o hunvreoù. N'eo ket evit ar bobl hec'h-unan. N'o deus netra da brometiñ dezhe. Perak ne vefe ket implijet ur brezhoneg «uhel» neuze ? Splann oc'h eo o doare-sonjal pa glaskont kelenn an dud. N'int ket aes en o botoù.

Setu ur paotr hag ur plac'h sammet gant dleoù ponner, kollet en ur c'horn dilezet, brevet gant

ul labour tenn ha trec'het gant darvoudoù kriz ha dic'hortoz. Ha petra vez prometet dezhe ? Frankiz Breizh ! Brezhoneg disi ! Met petra a dalv an traoù-se ? Ha cheñchet e vo o stad ? Kement-se a vo gwelet goude ! Pa vo libr ar vro ! Ya, moarvat ! Al labourerion n'int ket genaouek a-walc'h evit krediñ se.

Taget gant an dud a oa e-barzh ar sal, hon bourc'hizion pennoù-skañv n'o deus ket gouiet petra respont. Pegoulz e komprenint ?

Dav eo dezho mont d'an don donañ eus o enklask. Ne vo met avel ha moged keit ha na vo ket drailhet o maskl. Aze emañ an dalc'h.

Aldrig a Naoned.